

Hon Tad : hag a zo en neañ, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañ.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet genoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred genoc'h. **R/ : Ha get ho spered !**

Oan Doue :

Oan Doue a lamm pec'hedoù ar bed : ho peet truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

Setu Oan Doue, an hini a lamm pec'hed ar bed :

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma teet davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion : Diskan : Karet ho preuder, hag é vin genoh.

1 Me e 'r bara daet ag en neñv.(2w) 4 Ma chom ma c'homzoù bev ennoc'h,(2w)
Neb a gred ennon 'deus ar vuhez. Goulennet get feiz, reit e vo deoc'h.

2 C'hwi holl a zo skuizh ha sammet,(2w) 5 'El m'en deus an Tad Ma c'haret, (2w)
Deit ha Me 'rei doc'h nerzh ha kalon. 'El-sé eùé am eus ho karet.

3 Dait, c'hwi a glask ar wirionez, (2w) 6 Me e 'r vuhez, ar wirionez, (2w)
Ma c'homzoù zo spered ha buhez. An Hent ho kaso betak an Tad.

'Cit kloziñ an oferenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue genoc'h : **R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. **R/ : Amen !**

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver : **R/ : Bennozh da Zoue !**

Kan-dibenn :

1 Dirak ho relegoù sakret, 2 Mar hon kuita ho relegoù,
Santez Anna, Rouanez hor bro, Ho krasoù geneomp a chomo
Setu-ni c'hoazh ur wezh tolpet, 'Pad hon buhez en dañjerioù,
Tolpet 'eit lâret kenavo. A lein an neañ, c'hwi hon gouarno.

Parrez Ker Anna

5^e Sul ordinal

7^a viz C'hwevrer 2021

1^h lenn. : Jb 7,1..7

2^l lenn. : Ko 9,16..23

Aviel : Mk 1,29-39

Kan digor :

**Meulit an Aotrou Doue, C'hwi holl, e draoù krouet,
Traoù hag a weler splann, traoù ha ne weler ket,
Meulit e holl gelloud hiriv, àrc'hoazh, bemdez,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !**

**Meulit an Aotrou Doue, ha yenion ha tomnder,
Ha c'hwi hañv ha goañv, teñvalded ha sklaerder,
Noz dall a zu an douar, deiz kaer a splann en ne,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !**

**Meulit an Aotrou Doue, àr ho tron lugernus,
E mor bras ar splannder, e-tal ho Mab Jezuz,
Gwerc'hez santel Mari, kanit ho karantez,
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !**

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint genoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie (Ordinal hervez ton gwerz Pontkalleg)

Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañ, Doue an Tad hollgellougek. *Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lamm pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lamm pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.*

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr Job

Job a gomzas 'vel-mañ : Ha ned eo ket ur servij-soudard buhez an den àr an douar ? Hag e zeizioù, ha ned int ket deizioù ur goprad ? 'Vel ur sklav é hirvoudiñ d'ar waskedenn, 'vel ur goprad é c'hortoz e bae, 'vel-se eo ar miziadoù a geuz am eus bet da heritaj, an nozvezhioù a boan am eus bet da lod. A-boan ma em eus en em daolet da gousket en em c'houlennan : «A-benn pegours e tay ar mintin ?» Hag a p'en da

an noz e vên treboulet get an anken betek ma tarzh an deiz. Ma deizioù a zo aet fonnaploc'h evit burzun ar gwiader, ha setu ma finont pa n'eus ken a neud. Ho pezit soñj, Aotrou, emañ avel ma buhez ; an eurvad, ne vo ket ma lagad evit er gwelet arre.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 146 : Meulit an Aotrou a amant ar c'halonoù glac'haret !

Meulit an Aotrou evit e vadelezh, kanit hon Doue evit e zouster dezhañ eo dleet meuleudi.

An Aotrou a adsav Jeruzalem,
advodiñ a ra harluidi Israel.

Eñ a amant ar c'halonoù brevet,
lieniñ a ra o goulioù;

eñ a gont niver ar stered,

hag a c'halv pep unan anezhe dre hec'h anv.

Bras eo hon Aotrou ha galloudus e nerzh,
ha d'e furnez ned eus muzul ebet.

An Aotrou a adsav an dud izel a galon,
hag a ziskar d'an traoñ ar re fallakr.

eil lennadenn :

Lennadenn tennet a lizher kentañ an Apostol Paol d'ar Gorintiz.

Ma breuder, predeg an Aviel ned eo ket evidon ur raeson d'en em vrasaat ; un dra ret eo evidon gober kement-se; gwa ase evidon ma ne bredegahen ket an Aviel ! Ma rahen kement-se a ma fenn ma-unan, em behe ar gwir da vout ur gopr; met n'eo ket a ma fenn ma-unan er groan : resevet em eus ar garg d'en ober. Pesort gopr evidon neuze ? Ma merit a zo predeg an Aviel evit netra, en diaeziñ hep na gousto da zen ebet, hep tenniñ implij ag ar gwir a roa din an Aviel. Ya, goude ma oan em frankiz e-keñver an holl, em eus en em lakaet da sklav get an holl evit gounit al lodenn vrasañ ag an dud. Daet on da vout simpl get ar re simpl, evit gounit ar re simpl. Get an holl eh on daet da vout pep tra, evit donet a-benn da salviñ unanigoù. Ha kement-se a ran abalamour d'an Aviel, ma vin me ivez lodek en e vadou..

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Allelouia :

Kemeret en deus ar C'hrist hor poanioù
Douget en deus hor c'hleñvedoù.

Ar beleg : An Aotrou Doue genoc'h : **Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mark.

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Aviel : Pennad tennet ag aviel Sant Vark

A-benn, pa oant aet er-maez a sinagogenn Kafarnaom, Jezuz hag e zisiplad a yas da di Simon hag Andrew; Jakez ha Yann a oa gete.

Mammeg Simon a oa en he gwele get an derzhienn ; a-benn e komzont da Jezuz a stad he yec'hed. Hag eñ da dostaat, da grogiñ en he dorn ha d'he lakaat da sevel; aet e oa an dere'hienn kuit. Hag hi d'en em lakaat d'o servijiñ.

Daet an enderv-norz hag aet an heol da guzh, e voe degaset dezhañ an holl glañvourion hag ar re a oa dalc'het get an drouksperedoù. Ha kêr a-bezh a oa bodet dirak an nor. Amantiñ a reas e-leizh a glañvourion taget get pep sort drougoù ; ha kas a reas kuit karg a zrouksperedoù; ha ne laoke ket an drouksperedoù da gomz, rak int a ouie piv e oa-eñ.

Antronoz vintin, pell kent ma oa splann, Jezus a savas da vonet er-maez ha da bellaat betek ul lec'h diamen hag e chomas aze da bediñ.

Simon avat hag ar re a oa getañ, a yeas d'er c'hask; ha pa gavazont anezhañ e lârazont dezhañ : «Emañ an holl é klask ar ho-lerc'h». Eñ a respontas dezhe : «Deomp da lec'h-all, d'ar bourc'hioù nesañ, ma predeg in eno ivez, rak evit kement-se eh on aet er-maez.» Ha monet a reas a-dreuz Galilea a-bezh en ur bredeg er sinagennoù hag en ur gas kuit an drouksperedoù.

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, deuet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e teuy da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue genoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an Ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an Ne hag an douar : **Hosanna e lein an Ne !**

Ra vo benniget an hani az a e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an Ne !**

Gorreoù :

Gloar Deoc'h-C'hwi marv ar groaz ! Gloar deoc'h-C'hwi, Jezuz !

Adsavet lan a vuhez, hon Salver !

Hag hon Doue, C'hwi zey en-dro, Splannder lugernus !

Setu-ni ar-sav doc'h ho kortoz !